

**Yann-Vari Perrot A. Bayon**

## **Salaun ar Foll**

**Pez-c'hoari e daou arvest  
lakaet e gwerziou**

**Salaun ar Foll**, savet e yez Gwened gand an A. Bayon a zo bet bet troet diwarnañ e yez Leon, Treger ha Kerne gand an A. Perrot ; eun dra vad eo lakaad evel-se skridou Gwenediz e yez Leon, Treger ha Kerne, ha skridou Leoniz, Tregeriz ha Kerneviz e yez Gwened, rag seul vui eh en em zarempredo ar Vretoned en doareze, ha seul nebeutoh a zisheñvedigez a vezo etre o doare da gomz ha da skriva, hag, en hent-se, eun deiz a deui, - pa vezo ivez digoret pelloh, evel m'eo dleet, oll skoliou ar Vro d'ar brezoneg, - ha ne vezo mui e Breiz, adaleg Lomaze Penn-ar-Bed, tre beteg an Naoned hag adaleg Roazo tre beteg Pennmarh, nemed *eur yez, eur feiz hag eur galon !*

Notenn : Modernnaet eo bet an doare-skriva.

### **C'hoarierien**

Salaun ar Foll  
Melar, skolaer e Lezneven  
Budog, skolaer e Lezneven  
Iltud, ar piler gwez  
Ar Markiz  
Daou zoudard  
Loeiz, o vond da foar Lezneven  
Ronan, o vond da foar Lezneven  
Yann, o vond da foar Lezneven  
Herve, o vond da foar Lezneven  
Arzel, o vond da foar Lezneven  
Kaourantin, o vond da foar Lezneven  
Person Elestreg  
Ha meur a hini all.

An traou a dremen war-dro ar bloaz 1358 el leh m'ema bremañ iliz kaer ar Folgoad.

# Salaun ar Foll

*Kent ma sav ar gouel.*

## **Ar Homiser** (*a lavar*)

Bretoned, va breudeur,

Pa daolom eur zell war amzer-gwechall or bro, - ha vad a ra hen ober a-wechou pa ne vez ket a hoant da fallgaloni e-kreiz tristedigeziou an amzer-vramañ, - e rankom lavared :

Braz ar burzudou a zo bet  
E Breiz en amzer-dremenet.

Evelato, n'eus ket bet degouezet a re kalz kaerroh, moarvad, eged ar re a hoarvezas, e kalonenn Eskopti Leon, el leh a anvom bremañ ar Folgoad, hag a lakaas on tud-koz da zevel an iliz a zo eno, - 500 vloaz a zo - daoulinet ker kaer, en he sae vein dantelezet, dirag Intron Varia al Lili.

Ha setu perag on-eus kavet mad dond da zisplega dirazoh, hizio, e berr gomzou, burzudou ar Folgoad.

Eno gwechall, war-dro hanter ar XIV<sup>ved</sup> kantved, e veve eun den, Salaun e ano. Kared a ree ar baourentez, - souezusa tra, pa weler pegen troet eo bet a-bell viskoaz an dud da redeg war-lerh an danvez, - hag e-kreiz e baourentez e kavas ar furnez hag an eürusted :

Dindan ar soul, en e lochenn  
Ar paour a hell c'hoarzin laouen.

e-kreiz e goad ivez, Salaun a helle kana ker seder ha tra :

Amañ, pell diouz an trouz  
Hag oll savar ar bed  
Ar mêziou am helenn kerkoulz  
Hag ar gouizieka doktored.

\*

\*\*

Ar gwez bras en avel  
A bep tu 'zo fouetet.  
Koueza 'rin ma savan uhel  
Surroh eo eur vertuz kuzet.

## Arvest kenta

*Ar re a hoari an arvest-mañ :*

### **Melar, Budog, Iltud, hag all**

En eur hoad, e-kichenn an Elestreg, war-dro ar bloaz 1358.

Eur feunteun, a-gleiz, gwaskedet gand eru wezenn zero ; e korv ar wezenn, a-zehou, skeudenn ar Werhez. Kel liez gwech ma komz Salaun ouz ar Werhez e sell etrezeg ar skeudenn-ze. Melar, eru glin ouz an douar, a ev dour gand eur grogenn sant-Jakez.

### **Budog**

*(Azezet war eur mên en e gichenn, e zorn dindan e elgez).*

E-leh dizrei d'ar skol, Melar...

### **Melar**

*(Eur pennadig goude).*

Ha petra 'ta,

Budog ?

### **Budog**

Me a garfe chom amañ da veva.

### **Melar**

Pebez soñj !

### **Budog**

Ker kaer eo an amzer hag ar hoad  
Kel laouen ! Eun douster hep par a domm ar gwad,  
« Hic segura quies et nescia fallere vita ».

### **Melar**

Gwir eo.

### **Budog**

*(En eur zevel)*

Kleo peger brao e kan al laboused  
Da embann en o yez meuleudi mestr ar bed !

### **Melar**

Avia tum resonant avibus virgulta canoris.

### **Budog**

Peger fresk eo 'r bleuniou, peger fresk al leton,  
Eun tamm bara, Melar, evid terri va naon.  
Gand eul lomm euz dour sklêr ar feunteun-mañ kuzet  
Ken dous dindan ar roh ma red heb m'her gwelfed.

Ya ! gand dour ha bara me a hellfe bemdez  
Rei he gwalh d'am halon ha maga va buhez.

**Melar**

*(En eur zevel ivez)*

Buhez da gorv, Budog, nann buhez da spered  
Rag da vaga honnez, mond d'ar skol a zo red.

**Budog**

Ya ! Ya ! ha koulskodue ma vefen 'vel Salaun,  
'Vel salaun ar foll a vev, amañ, end-eeun  
Heb goulenn, abaoe ma'z eo ganet netra  
Nemed, p'en-devez re a naon, eun tamm bara.  
Ma vefen diskiant 'veltañ, ne zoñjez ket  
E vefen ken eüruz o tremen der ar bed ?  
Eürusoh e vefen marteze ?

**Melar**

Marteze !

Piou 'oar ? Hini n'her goar nemed Doue. Med me,  
Me 'zoñj ar pezh en-deus 'r muia talvoudegez  
Ennom eo dres ar spered-se a zisprizez,  
O veza ma'z eo red mond d'ar skol d'her maga.  
Ar spered-se a splann e peb den eo a ra  
Dezañ kerzed e-kreiz teñvalijenn ar bed  
War-zu Doue, a-dreuz hent braz an traou krouet  
Ha kentoh 'vid c'hoantaad o stad evel ma rez  
E vije gwelloc'h dit, Budog, kemer truez  
Ouz an dud diskiant, evel ouz an dud keiz  
A jom teñval o daoulagad pa darz an deiz.  
Dall int oll. Te 'vije eüruz ma vijes dall ?  
Dall a spered pe dall a gorv, an daou 'n em dalv.  
Gwelloc'h eo dit kentoh triugarekaad Doue  
Ha mond d'ar skol hep keuz hag hep glahar, difre...

**Budog**

Mond a rin heb glahar, med keuz am-bo atao  
D'ar hoajou don ha d'ar mêziou digor, pa vo  
Red deom e-doug c'hweh miz beva en on ti koz  
Mogeriou braz tro-dro dezañ 'vel d'eur gêr gloz.

**Melar**

Deom dillo.

**Budog**

N'ez in ket ken n'am-bezo gwelet  
Salaun ha gouezet hag eüruz eo er bed.

Setu !

**Melar**

Med te 'oar vad emichañs, penaoz ez a  
Bep beure da chapel an Intron Varia  
Da Lezneven evid kleved an overenn.  
Ha dond a ra en-dro d'ar hoad, en eur houlen  
A di da di, a zor da zor, an aluzenn.  
E hortoz ? Mall eo mond ; an amzer a dremen  
Buan.

**Budog**

Med setu-eñ ! Deompelloh.

**Melar**

C'hoant da gomz gantañ, gra. Med m'az peus

**Budog**

Nann.

**Melar**

Perag ?

**Budog**

Da gaoud eur respont fall. Aon am-eus

**Melar**

*(Vel pa vefe nehet o klask pe hent kemered).*  
Sach ganez da skasou  
Neuze. Pe en hent-mañ ?

**Budog**

Pe en hent-se ?

**Melar**

Ez eont da Lezneven. Deom en hent-mañ da weled. O-daou

**Budog**

Ma faziom ?

**Melar**

E teuim war or hiz, en eur red !  
Che !

*(Mond a reont kuit).*

Salaun

O ! Gwerhez Vari, Gwerhez, Gwerhez Vari  
Ker brao ha c'hwi n'ez eus ket bet biskoaz hini.  
Hini ker koant ne vo biken. O ! Maria.  
Va Mamm !...  
Bennoz deoh va Doue 'vid ar bara.

*(Ober a ra sin ar groaz gand ar bara goude beza en em lakaet en e azez war ar roh).*

En ano 'n Tad, ar Mab hag ar Spered Santel,  
O ! va Doue, c'hwi 'zo meulet, gand peb bugel !  
Ra vo meulet ivez ho Mamm, ra vo meulet  
Hoh ano, O ! Mari, O ! Gwerhez venniget,  
Benniget dreist an oll gwragez ha dreist an oll  
Êlez....

Kennerzit, Mari, ho paour-kêz foll.  
*(Eñ a zebr e vara goude beza e zoubet en dour, ha goude-ze e tiskenn er feunteun beteg e ziskoaz ; pa 'z eo deut er-mêz anezi e krog en eur barr hag e kan a-bouez e benn en eur en em vrañsellad. E-pad an amzer-ze,)*

### **Ar ganerien**

Ar peoh santel  
Gand an avel  
A zav euz ar hoajou didrouz  
Etrezeg Mamm  
Vad ha dinamm  
Or Zalver ganet war ar plouz.

• \*\*

Rouanez kaer ar baourentez,  
Enor deoh a-berz an tudou  
A en em ra 'hed o deizioù  
Paour a spered pe a zanvez.

*(E-pad ma kaner ar houblad diweza, Salaun en eur en em vrañsellad a respont :*

O ! Maria !

*Derhel a ra d'en em vrañsellad beteg ma'z eo galvet dre e ano).*

### **Budog**

Sell 'ta, faziet om !

### **Melar**

Ar hoad en-deus kement  
A heñchou hag a ya hag a deu ma tihent

Eun den dillo a-walh.

**Budog**

*(pa zistro)*

Sell ! petra 'stourm outañ ?

**Melar**

Eun tomma 'ra d'e gorv evel e-kreiz ar goañv.

*(Ouz e helver)*

Salaun !

**Salaun**

*(a baouez d'en em vrañsellad).*

A !

**Melar**

Kleo 'ta, n'out ket bet re spontet

Ouz or gweled ?

**Salaun**

*(ne respont ket).*

**Budog**

*(O tostaad outañ).*

Lavar, perag ne gomzez ket ?

Lavar deom ha kavet az-peus an eürusted

Amañ, pell diouz an trouz hag oll savar ar bed ?

**Salaun**

Gwerhez Vari !

**Melar**

Anaoud a rez Mamm on Aotrou

Hag heh ano dalhmad a zailli euz da henou.

He hared kalz a rez, klaoustre ?

**Salaun**

O ! Maria...

Maria !... O ! Gwerhez Vari !

**Melar**

*(fallgalonet, a-gostez).*

Koulz eo netra !

Ne oar ket e-unan zoken petra 'lavar ;

E vrasa plijadur eo pignad ouz ar barr.

Kenavo, Salaun.

**Budog**

*(en e gichenn, goustadig).*

Salaun, eüruz out

Amañ ? Komz, ha diouz ma vo e rin eveldout !

**Melar**

*(en eur vond kuit).*

Perag koll on amzer gand eur paotr heb spered ?

Laosk hennez.

**Iltud**

*(ar piler gwez, e vouhal war e skoaz).*

O ! Setu kompagnunez, me 'gred,

Salaun ! Devez mad deoh ho-tri !

**Ar skolaerien**

Dedoh ivez.

**Iltud**

Hag ar skol ? Mall eo deoh tostaad, paotred, anez

E klevoh trouz p'en em gavoh e Lezneven.

**Melar**

Dillo a-walh, ya, rag striz eo warnom al lezenn.

**Iltud**

Mad evel-se, c'hwi a deuio da veza tud

Gouizieg 'vel ar veneh a oa gand sant Iltud

Gwechall-goz hag ar re a zo c'hoaz e mouster

Landevenneg hizio an deiz ! Feiz, mad a reer

Mond d'ar skol ha deski pa oar yaouank 'veldoh ;

An inosant kêz-mañ ne vo ket desketoh,

Tamm 'bed evid kosaad, hag ar memez komzou

Euz ar beure d'an noz a gouez euz e henou.

**Ar skolerien**

Peseurt komzou ?

**Iltud**

Gwerhez Vari ! O ! Maria !

**Melar**

Peleh e labourit ?

**Iltud**

Du-hont, tostig amañ,

Emaon o pilad gwez da varheg Gwikelle,

Va Mestr.

**Melar**

Ar Markiz rus.

**Iltud**

Chut ! en aon n'ho klevfe

Rag dond a ra bemdez, koulz pe goulz, da weled  
Va labour, hag eh heuill an hent-mañ hed-a-hed  
Rag mignoned vraz int ar foll hag eñ.

**Budog**

Fall eo

'Vid ar re all !

**Iltud**

Ha n'eo ket gwellaad a raio,  
Siwaz, ar paour-kêz den, tra ma chomo danvez  
Gantañ. Eur yalhad vad a denno euz ar gwez  
A ziskarin dezañ er bloaz-mañ c'hoaz 'velkent,  
Med kement en-deus a gemer ar memez hent,  
Eun hent louz, va zud keiz. Feiz ! Doue or barno !  
A ! Salaun, mud out ? Petra, klañv out hizio ?

**Salaun**

Nann !

**Iltud**

*(d'ar re all).*

Nann ! eun dra bennag en-deus. A ! marteze  
Eo bet goapaet e kêr gand ar hoz vugale.  
Ken dous eo koulskoude ma'z eo eur gwall behed  
Ober dezañ eur wech nemetken bep kantved  
An disterra glahar.

**Melar**

Ne gomz tamm 'bed muioh

A-wechou ?

**Iltud**

Eo ! meur a wech pa vezan pelloh  
Du-hont, e kan.

**Budog**

E kan ? Gwerziou ?

**Iltud**

Ya ! ya ! ar pez

A deu en e spered. O ! eun drugar e vez  
E gleved ha teuler a rankan a-gostez  
Va bouhal p'en em ro da gana.

**Budog**

Aliez

E kan ?

**Iltud**

Ya ! Meur a wech ar hoad oll a dregern  
Gantañ ken c'hwek, ker brao, ma savan va diskouarn  
Raktal 'vid e zelaou.

**Budog**

Kab deom eur ganaouenn.

**Iltud**

O ! biken n'her graio, kaer ho-pezo goulenn.  
Red eo e vefe e-unan.  
(*Mond a ra kuit*).

**Melar**

Pellaom eta !

**Budog**

Eüruz ar re izel, Doue o uhella.  
(*Mond a reont kuit*)

**Salaun**

(*E-unan*).  
O ! Gwerhez venniget, eet int oll gand o hent.  
Setu-me adarre, va-unan-kaer 'velkent.  
Int a gred ez on foll ; med ya, foll on ivez  
Ha ne faziont ket... foll dre ar garantez  
'M-eus evidoh, O ! rouanez va halon baour.

(*O selled ouz e feunteun*).

Feunrteun, kuzet ken don ma klever trouz ho tour  
Heb her gweled, amañ e soñjan hep paouez  
En hini a anver feunteun ar wir vuhez,  
Feunteun guzet 'vid an darn vraz, nann evidon  
Rag enni e kavan oll dudi va halon.

(*Eñ a gan hag hekleo ar hoad a respont : O ! Maria*).

O ! feunteun kuzet 'vid an oll  
Hag anavezet gand ar foll.  
Diwamllit hi 'vid hen digoll  
Diouz dour brein an eien diroll.

O ! Gwerhez hlan 'vel al lili,  
Me 'venn mired evidoh-c'hwi.  
Mar hen divennit, O ! Mari,  
Va halon ken êz da zaotri.

*(An ograou a gendalh da hoari e-pad ma komz amañ war-lerh).*

Bennoz deoh, va Doue, da veza greet ker brao  
An neñv hag ar hoajou hag ar gwez braz a zao  
Ken uhel a-benn deoh o fenn hag o divreh.  
Bennoz deoh, va Doue, trugarez deoh, mil gwech,  
Rag m'hoh-eus greet ker brao ar Werhez ha ker glan  
'Vid he hared, he servicha, hi he-unan  
Am-eus kuitaet va zud, pep tra d'am ugent vloaz  
Evid beva amañ, paour, war an douar noaz ;  
Er hoad-mañ a garan, pell diouz savar ar bed  
Diouz ar bed fall ha brein, 'vid beva disprizet  
Ya ! med tostoh dezi ha deoh, o ! va Doue.

*(Trei a ra war-zu skeudenn ar Werhez).*

O ! va Intron, va Mamm, O ! splannder va ene,  
Me 'oar a-walh ar bed a glasko va gounid  
Hag a ginnigo din kement tra a ginnig  
D'ar re a venn hen heuill dre ar fank hag ar pri  
Plijadur ha danvez hag enor, tri dra, tri,  
Hag a ginnig d'an oll hag ar re o hemer  
A welan ahanenn ouz taol, ar memez boued bepred,  
Ar memez naon war-lerh er galon strafuillet.

*(An ograou a ehan da hoari).*

### **Salaun**

*(o tistrei).*

A ! Ar markiz !

### **Ar Markiz**

*(gand eur mignon dezañ).*

A ! A ! Salaun, eun doare !  
N'ouzez ket ! brudet out pell braz hag ar roue  
Az klask. Setu eun den a zo deut euz e berz  
Bremaig beteg va forz da houlenn war da lerh.

**Ar Mignon**

(a-gostez).

Na pebez mojenn !

**Ar Markiz**

(dezañ).

Laosk 'ta.

(kreñv)

Ar roue en-deus c'hoant

Da gaoud eur foll d'e lakaad da hoarzin. Kontant

Out da vond gand hemañ da Bariz, Salaun ?

Eno az-po enor, plijadur, hag end-eeun

Ne vanko dit nemed paourentez. Gra dillo

Da zoñj. Lavar deom ha kuitaad a ri da vro,

Ar merhed koant ?

(A-gostez).

Bremaig e facho.

(Kreñv).

Hizio dres

Am-eus c'hoant da gleved ganez petra 'zoñjez

Euz Marharid Pennmarh, eur gaer a bennherez ;

Ma vije da bried, eüruz braz e vijes.

Ne glevet ket ?... Ez eom d'he hlask dit : Ar Werhez

Ne vezo ket laouen euz a ze a zoñjez,

Nann ; ar Zent euz an neñv, va mab, n'o-deus ket mui

Si ebed hag eur si braz eo ar warizi.

**Ar Mignon**

(O tiskouez Salaun).

Mad eo !

**Ar Markiz**

(A-gostez).

Ya, mud e vez pa stagan da farsal

Gantañ.

(Kreñv).

Me a baeo sonerien 'vid ar bal.

Salaun, respont 'ta. Mouzet out. Gwaz a ze.

`N' glaskin maouez ebed dit ken. M'o dalho-me

Oll evidon... Kenavo, Salaun.

**Salaun**

Kenavo.

**Ar Markiz**

(En eur ziskouez ar hoad gand troad e skourjez).

Sellit, an tu-ze toud euz ar hoad a gouezo.

*(Pellaad a reont).*

### **Salaun**

*(O selled etrezeg enno).*

Ya ! 'Vid sevel arhant hag aour deoh, den euzuz,  
Da ziskenn c'hoaz donnoh er bouillennou mezuz.  
Ma vevit c'hoaz, eur bloaz bennag, a-hoad a-bez  
A gouezo sur d'an traoñ, nebeud-ha-nebeud bemdez.  
Eur hoad ken brao, ker fresk en deiz, ker c'hwek en noz  
Hag eun iliz, iliz va Mamm, va baradoz.  
O ! koajou don, koajou klouar, ne me ho kar !  
N'oun ket perag e klask ar vouhal ho tiskar.

### **Ar ganerien**

Ar peoh santel  
Gand an avel  
A zav euz ar hoajou uhel  
Etrezeg Mamm  
Vad ha dinamm  
An eneou glan hag izel.

Ar plijaduriou 'ro er bed  
Oll war eun dro ne dalvont ket  
Eur predig hepken tremenet  
Amañ gand ar muia-karet.

*(Salaun e-pad ar houblad diweza a respont : O ! Maria).*

### **Salaun**

*(O tistrei).*

Trouz a zo !

*(Selled a ra etrezeg ar hoad).*

Soudarded ! Va mirit, O Mari !

### **Iltud**

*(D'ar zoudarded).*

Ya, dre amañ war-eeun e kerzoh difazi.  
An hent-mañ ho kaso da varhallah ar gêr.

### **Ar Zoudarded**

*(Unan pe unan anezo).*

Trugarez deoh, den mad.

### **Iltud**

Ouz ho kortoz emaer  
Du-hont, rag deh-veure, e pep bourk tro-war-dro  
'Oa embannet e vijeh bet hizio er vro,  
O sevel soudarded yaouank da gas ganeoh.  
Daoust ha pedavare, pelloh, e teuy ar peoh ?

**Ar Zoudarded**

Den n'hen goar.

**Iltud**

Gwaz a ze ! Laza 'rit rud atao ?

**Ar Zoudarded**

Ya ! ya ! beb gwech ma kavom tro, or micher eo.

**Iltud**

Trista micher !

**Kenta soudard**

N'eo ket tristoh 'vid da hini  
Te, gand da vouhal zir a lar eveldom-ni.  
Te 'daol ar gwez d'an traoñ hag a lam dignato  
Ar gwad hag ar gwriziou a ro buhez dezo.  
Ni, gand or hlezeier, a stlap tud ouz torgenn  
Hab kaoud tamm droug outo p'o gwelom o tremen.  
'R zoudarded 'zo paeet da ober lazerez  
Evel m'out-te paeet evid pilad ar gwez.

**Iltud**

O ! ya, med...

**Kenta soudard**

Med petra ? Evel-se eo, va den.  
Peb micher a zo mad ma laka aour melen  
Da drouzal meur a wech er yalh hag evaj c'hwek  
Da vervi 'barz ar gwer, a-raog diskenn er beg.  
Deus ganeom, mar kerez !

**Iltud**

A ! Nann, hag e vije  
Roet deg mil skoed din !

**Ar Zoudarded**

(*O tiskouez Salaun*).

(*O tostaad outañ*).

Hag hennez ?

Piou out-te ?

**Iltud**

Eur paour-kêz inosant...

**Ar Zoudarded**

(O c'hoarzin).

O ! da weled, hennez

'Zo furroh egedout...

**Iltud**

Mond a ran d'am devez.

Kenavo !

(En eur vond kuit).

Pebez tud !

**Ar Zoudarded**

(Da Zalaun).

Pe ano 'z-peus ? Komz 'ta.

**Salaun**

(Goude eur pennadig).

Salaun.

**Kenta soudard**

Salaun.

(A gostez).

Deut eo 'velkent.

(Kreñv).

Kleo 'ta,

Salaun, ne dout ket kontant da zond ganeom.

O ! sell 'ta, na pebez samm arhant a lakaom

Dit en da zorn. Eüruz e vezi en or mesk,

N'eus forz pe leh ez aim, bara, gwin ha kig fresk.

Ne glevet ket ? Respont, rag erru out en oad

Da gemer eur vicher. Dizasun eo da goad.

Deus d'on heul d'ar brezel.

**An eil soudard**

Ober a ra e foll

Evid ma vo laosket da veva en e roll,

Didrabas ha didrouz. N'eo ket gwir ?

**Kenta soudard**

Ya ! moarvad,

Rag eñ a venn atao beva heb labourad

'Vel m'en-deus greet beteg bremañ.

(Da Zalaun).

Gouzoud a rez

E rank an den gounid ar pezh a zebr bemdez.  
Ganeom her gounezi. Deus eta ; med gand piou  
Emaout ? Pe gand Montfort pe gand Bleiz ? Peseurt liou  
A zougez ? Lavar deom.

**Salaun**

N' on nag a-du Montfort  
Nag a-du Bleiz, tud keiz !

**Kenta soudard**

Dre an diaoul hag e forh,  
Evid piou out-te 'ta ?

**Salaun**

'Vid ar Werhez Vari.

**Kenta soudard**

Mar deo an doare-ze, chom aze d'he fed.

**An eil soudard**

Foll mad eo !

**Kenta soudard**

Deom ahann. Doue ra wellaio dit, paour-kêz.  
(*Pellaad a reont*).

**Salaun**

O ! va mamm vad, kredi a reont er follentez  
A ziskouezan amañ dre garantez 'vidoh ;  
Med i eo a zo foll, an dud keiz, ya, falloh  
'Ged ar re o-deus bet an nebeuta spered.  
Goulou or spered a dalv deom hervez ma sked,  
Kalz pe nebeud. O ! med n'eo ket ouz an dra-ze  
Da houzaout ma'z om foll eo e taol pled Doue.  
Eñ a zell ouz ar pezh a zeu en or zoñjou.  
Ouz ar sklêrder a daol or spered war an traou,  
Mar deo glan, mar deo eeun, ouz ar pezh a hoantaom  
Hag ouz ar magadur yahuz pe nann a room  
D'or halon.

(*Goude eun tammig ehan*).

Paour-kêz tud ! a gred eo gand arhant  
E hellint dond a-benn da hounid va asant.  
Ne ouezont ket penaoz gwechall me a zo bet,  
Pa varvas va herent, pinvidig ha karet  
Hag em-eus roet oll va madou d'ar beorien.

*(O trei war-zu ar Werhez).*

'Vid mired evidoh, va halon digailenn.

*(O tistrei).*

A ! setu c'hoaz tud all ! Gwir eo. Marhad a zo

Hizio e Lezneven. Kouëriaded int. Ra vo

Ar peoh ganto.

*(Gweled a reer e traoñ leur ar c'hoari kouëriaded o sacha war stagou o loened).*

**Loeiz**

O ! O ! Setu ar foll, paotred.

Pellait al loened, dillo, en aon na vent skoet

Gand eur hleñved bennag a-berz ar sorsers-ma'.

It ganto dre an hent all 'ta !

**Salaun**

*(Azez e-tal e feunteun).*

O ! Maria.

**Ronan**

Mad, perag klask neuze dond ganto, dre ama'.

**Yann**

Tostoh eo !

**Loeiz**

Tostoh eo, sur a-walh, med p'ema

An droug war lez an hent ouz ho kortoz, me 'gred

Eo gwell tehed, da vihanna, gand al loened.

o ! O ! p'o gweloh o vervel, 'vela ma varvas

Va beoh-me, dilun diweza ez eus bet bloaz

E vezoh dizonet, en eur wech, mil gitez.

**Ronan**

Eur penn-dañvad 'zo bet marvet din-me ivez

Gand eur zell a daolas ar foll-ze warnezañ

Eun deiz, ma tremenen amañ.

**Loeiz**

An amprevan,

Ma karfe, da vihanna, pa vez deiz marhad

Koulz ha pa vez deiz foar e Lezneven, pellaad,

Ha lezel frank an hent gand an dud. A ! emao

En em gavet ! Neuze eo e tostoy ouzoh,

An droug gantañ, sellit.

**Salaun**

*(En eur astenn e zorn).*

Salaun a zebrfe

Bara !

**Loeiz**

Ya ! ya ! Kanfrat, med red eo, evel-se,  
E hounid da genta. Kreñv out, ha yah, d'az oad  
Eun den a dle gouzoud labourad. Pesort gwad  
A red en da wazied eta ? Gwad an noblañs ?  
Kerz neuze beteg Lezneven da glask eul lañs  
Hag eul loan gand ar re a dle beza eno  
O sevel soudarded da Vontfort, duk ar Vro.  
Kemer eur stad benang, soudard pe labourer,  
Rag d'an oad az-peus eo eur vez chom heb micher,  
Ha beza o veva gand an aluzennou  
A dapez, deiz-ha-deiz, pa'z eus en da vemprou  
Nerz a-walh da zerhel eur bal pe eur hleze,  
Ha da heuill eur vicher bennag evel ma tle  
Ober pep unan. Eur vez eo !

**Salaun**

Gwerhez Vari !

**Loeiz**

Ya ! Gra da ziskiant. Ne dromplez ket hini.  
Foll out, ya, da weled ! Med pa zav c'hoant ganez  
Da ober droug d'an dud, neuze da zorserez  
A hoari ha ne vezez ket ken diskiant.

**Yann**

Med, e-leiz koulskodue a lavar eo eur zant.

**Loeiz**

Eur brao a zant. Mar deo red beza sod brema'  
'Vid plijoud da Zoue, setu eur haer a dra.

**Ronan**

Piou 'oar petra eo eñ ?  
*(Da Zalaun).*

Piou out ? Hag a beleh

Out deut amañ da jom ?

**Loeiz**

Respont 'ta, mab ar zeh.

Te eo, her gouzoud mad a reom, az-peus miret  
Ouz ar zegal hag ar gwiniz da rei o hed  
Er bloaz-mañ koulz ha kent. Ma torr ar herh, te eo

'Zo kaoz. Te eo a ra d'an avel fall, pa dro  
En da spered, c'hweza war ar vro, hed-a-hed  
Adaleg Kastell-Paol, tre beteg Penn-ar-Bed.  
Ar hleñvejou kousket, ne vern pe leh ez ez,  
Te o dihun, pezh fall ha dre ma tremenez  
E varv ar chatal ha zoken ar vugale.  
N'eo ket gwir ?

**Ar re all**

Eo, gwir eo !

**Herve goz**

Nann.

**Loeiz**

A !

**Herve**

Nann, Loeiz, kement-se

N'eo ket sur.

**Loeiz**

Re zur eo !

**Herve**

Me n'am-eus ket klevet

Ken eo bremañ eur penn kristen o lavared  
Traou anezañ Ha koulskoude am-eus treuzet  
Ar hoad-mañ aliez.

**Loeiz**

Hoh-unan ?

**Herve**

Va loened

Ha me, ha droug ebed ne zegouezas morse,  
Na ganen na ganto.

**Loeiz**

Brao 'maoh ganin, neuze.

**Arzel**

N'em-eus ket da glemm anezañ kennebeud.

**Kaourintin**

Me

Am-eus doujañs kenañ 'vid an dud ar seurt-se.

**Ar re all**

A !

**Kaourintin**

Me 'zoñj int tostoh egedom da Zoue.

**Loeiz**

D'an diaoul kentoh, d'an diaoul, mil malloz !

**Herve**

O ! Ha te

Ouz piou e tostaez, lavar deom, heb glabous,  
Pa gomzez gand kement a gounnar hag a drouz.  
'Eneb eur paour-kêz paotr hep spered a houlen  
Bara ouzit ?

**Loeiz**

*(En eur zevl e skourjez, an troad d'an neh evid skei).*

Malloz !...

**Herve**

Loeiz, sell ouz va bleo gwenn.

Laosk da fouet a-gostez ha selaou eun aviz.  
En amzer ma vleunie ennon va yaouankiz  
Ez eus bet desket din kaoud doujañs e-keñver  
Ar re goz ha dinerz, ar pezh a zizoñjer  
Bremañ re aliez, rag piou 'zo dinersoh  
Eged ar paour-kêz sod ?

**Loeiz**

Tavit, mar plij ganeoh.

N'emaom ket en iliz, amañ hag a-hend-all.  
D'ar person eo prezeg pa vez red, mad pe fall,  
Me 'zelaou e gomzou, da zul, nann ho re-c'hwi.  
*(Mond a ra kuit).*

**Herve**

Gwaz a ze !

**Salaun**

Salaun a zebrfe bara.

**Herve**

*(En eur rei bara dezañ).*

Del

Va mab, bennoz Doue dit.

**Salaun**

*(O trugarekaad).*

O Gwerhez santel.

**Herve**

*(En eur vond kuit gand ar re all).*

N'oar netra ebed ken.

**Kaourintin**

*(Chomet da ziweza).*

O ! mad e vije din

Rei dezañ ivez eun dra bennag, mar don fin,

Rag gand tud a seurt-se gwella 'zo da ober

Eo en em lakaad en o grad vad, pa heller.

*(Pellaad a ra goude beza roet eun tamm euz e vara da Zalaun).*

**Salaun**

O ! pebez boked kaer am-eus tapet, va Mamm,

Da ginnig deoh... Me 'daol war ho kalon dinamm

An oll zismegañsou 'zo bet greet din hizio...

Bokedou an douar a goll o liou dillo...

A foeñv, med va re-me a jomo bepred kaer.

Ar bokedou a daol an dud warnon, m'o zerr

A-vriad gand ar spern a zo outo ; me 'lam

Ar spern, ar pikou lemm, m'o diframm tamm-ha-tamm,

M'o mir ganen, ha deoh me ro bleuniou heb drein,

Bleuniou c'hwez vad, m'o hinnig deoh war va daoulin.

Grit ma vin disprizet, muioh c'hoaz gand an oll,

Gand an oll... 'Vidoh c'hwi hepken, ar paour-kêz foll

A viro e spered hag e galon digor

Da ziskouez deoh eur garantez don 'vel ar mor.

*(Goude eun ehan oh en em zistrei).*

A ! setu an Aotrou Person, va hovesour,

Gwerhez Vari, bezit bepred war va zikour.

**Ar Person**

Doue ra »z pennigo, Salaun.

**Salaun**

Mil bennoz

Doue deoh, Aotrou Person... Med skuiz oh... Penaoz,

Tud klañv ho-peus ?

**Ar Person**

*(A-gostez).*

Petra a lavarfen dezañ ?

*(Kreñv).*

Ya ! ya ! Korn pe gorn, er barrez, e vez tud klañv,  
Salaun, hep paouez, a gorv hag a spered.  
Tud klañv a vez dalhmad.

**Salaun**

Gwaz a ze.

**Ar Person**

N'out ket bet

Klañv, biskoaz, te ?

**Salaun**

Biskoaz.

**Ar Person**

Te, koulskoude, hervez

Ma leverer, eo a sko, dre fallagriez,  
An dud hag an traou... gwasoh out 'ged ar brezel  
A lavare din bremaig, a vouez uhel,  
En eur doui, ar gouëriaded am-eus kavet.  
Gwasoh out 'vid ar vosen...

**Salaun**

*(Gand tristidigez).*

Ya ! ya ! a gred

An dra-ze.

**Ar Person**

Ha setu perah e skañvbennont,  
Hag out deut da veza, paour-kêz, sorser ha spont  
Ar Vro... O ! o fehed a gouezo warnezo...  
Med...

**Salaun**

*(Gand anken).*

Med petra ?

**Ar Person**

*(Gand douster).*

Warnout ivez e kouezo.

**Salaun**

Warnon, Gwerhez Vari.

**Ar Person**

*(Heb gourdrouz).*

Laosk ahanon, selaou.

Da gomz dit eo bremañ, pa n'eus nemedom on-daou.

Te eo 'ro dezo da doui 'vel ma reont.

### **Salaun**

Aotrou Person !

### **Ar Person**

Pell 'zo, abaoe ma klevont

Bep seurt brud ahanout.

### **Salaun**

*(Gand nerz).*

Sorhennou !

### **Ar Person**

Me 'oar vad,

Med kement-se a lak an diaoul da labourad.

An dud a gomz hag a lavar 'bep seurt diotach

Diwar an dour ; gwasoh dindan nerz an evaj.

Klask a rez, eemezo, louzou ouz ar stered,

En noz, hag e taolez an droug war al loened,

... War an dud. Te eo c'hoaz a sko ar gwez frouez,

A vir ouz an heol da domma. O ! eun druez

Eo o hleved. Perag ivez ober da foll

Evel ma rez, amañ, e kêr, a-wel d'an oll.

### **Salaun**

O ! Aotrou Person, c'hwi 'anavez ahanon,

Ha beteg ar goueled e lennit em halon.

Am anaoud a rit koulz ha m'her gran va-unan.

### **Ar Person**

Ya ! Salaun, ha setu perag, dres, e teuan

Da anzaou gand ruster ouzit ar wirionez,

Med o soñjal 'v'lato, komz dit gand karantez.

N'emaout ket en hent mad, nann, va mab, an dra-ma'

A zo kenetrezom, an Intron Varia

A zo test, Salaun, amañ, am-eus dalhet

Ganen bepred ar pezh a anvez da zekred,

Sekred ar follentez a ziskouezez dre-oll

Evid mired ouz da ene da vond da goll.

Med gwell eo dit hiviziken, mar am hredezh,

Beva 'vel ar re all... hervez ar wirionez.

Ar wirionez a lavar 'n-deus Doue roet

Madou dit : ouz o rei d'an nesa az-peus greet.

Mad : selaouet az-peus kenteliou ar Zalver  
Pa lavar deom 'vid e heuill, gwell en em zizober  
Euz kement tra a hell pounnerraad on ene ;  
Seul-vui eo skañv an den, seul gwell e hell bale.  
Mad az-peus greet eta ; med Doue 'n-deus roet  
Madou all dit ouspenn ; ar madou-ze : kened  
Ha yaouankiz ne fell ket dit komz anezo.  
Tremen a raint, va mab, 'vel ar vuhez, dillo.  
Med ar spered 'zo bet roet dit gand Doue,  
Petra 'z-peus greet gantañ ? E guzet abaoe  
Mil bell. Ya ! e guzad a rez, ar spered-se  
Kel lemm, ker fur, ker kaer, roet dit gand Doue.  
Kabluz eo an hini a flastr e zaoulagad  
En eur vouga enno ar splannder 'vid lakaad  
An deñvalijenn yen da vond d'e heul bepred.  
Kabusoh an neb a zispriz e spered  
Beteg mond da drei kein dezañ dirag an oll  
Ha kaoud e blijadur o tremen 'vid eur foll.

### **Salaun**

Aotrou Person, ma ran an diskiant 'vel-se,  
N'her gran nemed evid plijoud gwell da Zoue.

### **Ar Person**

Nann ! Salaun, biskoaz den n'en-deus lavaret  
Evid beza eun deiz e-touez ar re zalvet  
E vije red ober ar foll war an douar.  
Diwar-benn kement-se n'emaom ket en arvar,  
Na te na me : « Eüruz ar re baour, ar re zous,  
Ar re a gar ar peoh hag ar vuhez didrouz.  
Eüruz ar re a zo truezuz e-keñver  
An nesa », a lavare gwechall Or Zalver.  
Med, pas eüruz ar re a zispriz o spered  
'Vid plijoud da Zoue, ha beza disprizet  
Muioh gand an dud.

### **Salaun**

Ya ! fazia 'ran moarvad.

### **Ar Person**

Gwell r vije bet dit, paour-kêz, pinvidikaad  
Da spered, tamm-ha-tamm, ha kreñfaad anezañ  
Gand sikour da nesa ha n'eo ket e lezel  
Ken dister e halloud hag hini eun ezel  
Ne reas netra biskoaz... Te a oa koulz ha me  
Galvet d'eur garg santel gand an Aotrou Doue.  
Beleg, ya, Salaun, beleg, te 'vije bet

Er bed-mañ, eur splannder 'vid an dud dianket.  
Eur galon leun a nerz ha leun a drugarez  
'Vid an dud glaharet : eur feunteun a vuhez  
'Vid kalz ! te 'vije bet hader ar wirionez  
'Leh beza 'vel bremañ, eur benveg didalvez.

### **Salaun**

Ya ! gwir eo ! re wir eo ! Aotrou Person, m'her gwel.  
Diskennet on 'velkent, re izel, re izel !  
Soñjal a reen goude m'em-bije dilezet  
Va bro, roet va aour d'ar beorien, ha klasket  
Eul lochennig amañ, e-kreiz ar hoajou braz,  
Pell diouz ar bed, ha diouz an trouz hag an trabas,  
E chomfe c'hoz neuze ganen eun dra... eun dra  
Talvoudusoh e-leiz 'vid madou ar bed-ma',  
Eun dra hag en-dije bet lakaet ahanon  
C'hoaz da denna lorh anezañ, Aotrou Person.  
Ar pehed a vije deut da zaotri va halon  
Am-eus klasket kerkoulz ha n'eo ket heb rezon,  
Mired dalhmad atao, didrouz, dibeh ha glan  
'Vid ar Werhez Vari, ya, 'viti heh-unan.  
O ! va Doue, a liviris, ne jom ket mui  
Ganen 'med va spered, med eñ a hell saotri  
Va halon... Me 'vevo 'vel pa n'am-bij ket  
Hiviziken, dirag an oll, spered ebed.

### **Ar Person**

Doue hepken a oar piou ahanom war ze  
A fazi ; med lavaret am-eus dit va zoñj, me,  
Da berson, da wella mignon, da govesour,  
Goulenn eta emberr, sklêrijenn ha sikour  
Ouz Doue ! Kenavo.

### **Salaun**

*(Evid e zerhel).*

Aotrou Person !

### **Ar Person**

Warhoaz

Me zistroio...  
*(Mond a ra kuit).*

### **Salaun**

*(Fallgalonet).*

Va Mamm, O ! va Intron, biskoaz  
N'am-eus ket gouzañvet eur boan ker braz, ker kriz ;  
N'emaon ket ken en hent merket gand an Iliz.

O ! an ivern am losk ! Va ene 'zo en tan  
Pe anez gand ar zamm a bouez war va halon  
E voug... Va lazet ho-peus, Aotrou Person.  
N'emaon ket en hent mad. Faziet on ! Gwerhez  
Vari ! Me 'venn gouzoud ganeoh ar wirionez.  
Anez da ze, lazet e vin, gand va enkreuz.  
Diskouezit din ho sked, steredenn va buhez.

*(Ar Werhez a en em ziskoeuz dezañ d'e gennerzi).*

A ! A ! Deut oh, va Mamm, gwir eo eta emañ  
War an hent merket din : Trugarez deoh, Intron.

### **Ar ganerien**

O ! Madelez, O ! Madelez hep par  
An Intron Varia  
A deu war an douar.  
Na souezusad tra !  
O ! Madelez, O ! Madelez hep par

### **Ar Bobl**

O ! Gwerhez dous ar Follgoad  
Or Mamm hag on Intron,  
An dour en on daoulagad,  
Ni ho ped a-galon...  
Ouz or Breiz-ni, pa zellit  
A bep tu tro-war-dro,  
Sklêr hag anad e welit  
Oh rouanez or Bro.

### **Respont ar Werhez**

Euz va zu, Breiziz fidel,  
A ! N'hen dizonjtit ket  
Me 'roio deoh va skoazell  
Keit ha ma viot er bed  
Ha pa guitaot ho traonienn,  
Me c'hoaz, ouz ho kortoz  
A vo, gand ho kurunenn  
War dreuziou 'r Baradoz.

### **Ar Bobl**

O ! Gwerhez deuz ar Follgoad,  
Or Mamm hag on Intron,  
An dour en on daoulagad,  
Ni ho ped a galon.  
Ouz or Breiz-ni, pa zellit  
A bep tu tro-war-dro,

Sklêr hag anad e welit  
Oh rouanez or Bro.

## Eil arvest

### Ar Homzer a lavar

Burzuduz e-doug e vuhez, Salaun a zo bet burzudusoh c'hoaz goude e varo ; e vuhez a oa bet laouen, laouennoh c'hoaz e oe e dremenven ha bleun gwenn al lili diwanet war e vez a embannas dre ar bed kristen a-bez e oa eur zant muioh, e baradoz an Aotrou Doue, o pedi evidom.

O ! Bretoned, va breudeur, pebez kentel ! Ar gouennou tud all a ra goap ahanom o veza ma n'om ket ker barreg hag i da zastum madou ar bed-mañ.

Eur ouenn diwar-lerh eo bet ar Vretoned, emezo, a-oll-viskoaz, en emgann kaled ar vuhez ; foll om ; gwir eo o homz ; ne redom ket kement-se en oll war-lerh an danvez ha paour om, e-skoaz darn ; mad, ra vo benniget or paourentez !

« Bennoz d'or paourentez he-deus miret e kalon or gouenn an tri dra a ra d'an den beza denoh ; an druez evid ar re zinerz ; an nerz-kalon e-kreiz ar gwalleur ; ar gredenn e reizted eun Doue.

Bennoz d'or paourentez he-deus on diwallet ouz va gourdadou hag o mibien da vond da stoui dirag al Leue aour.

Bennoz d'or paourentez he-deus miret ennom ar Feiz, an Esperañs hag ar Garantez. Bennoz d'or paourentez he-deus greet deom derhel koun euz a wir ano ar vuhez : *eur gortoz* hag euz a wir ano ar maro : *eun tremen*.

Bennoz d'or paourentez hag a ra d'ar Helt gweled e poullou lagad digig an Ankou daoulagad doueel, doueel, doueel, an Hini lakaet e kroaz !

Bennoz d'or paourentez pa'z eo alhwez ar Baradoz<sup>1</sup> ! »

O ! madou ar bed-mañ a deuz, a vergl, a vez laeret, a vez erd o dilezel pa zoñjer an nebeuta !

N'eo ket da eta deom en em skuiza kement-se o redeg war o lerh.

Klaskom dreist pep tra ar madou hag a dalv ar boan o hlask hag evel Salaun, Salaun ar Fur, daoust ma oa lesanvet Salaun ar Foll, en em stagom hepken ouz an traou hag a dalv ar boan en em staga outo ; or Breiz hag on Doue, daou ano hag a dle chom skoulmet da virviken en or halon gand hini Mari e-kreiz.

### Eil arvest

*(An arvest-mañ a dremen er memez leh gand ar henta. Gweled a reer eur bez, dindan skeudenn ar Werhez, hag eul lilienn en eur penn anezañ).*

### Budog

*(E dok en e zorn, goude eur pennadig).*

Ar gwez o-deus kavet o deliou en-dro !

*(Chom a ra sebezet o weled al lilienn).*

A !

*(Oh en em zistrei war-zu ar mêz).*

Deus 'ta, Melar, deus 'ta da weled pebez tra

Sebezuz !

---

<sup>1</sup> Tennet euz *Tri neved, Teir bedenn*, unan euz pennadou-skrid kaerra J.P. Kalloh en e levr dispar *Ar en deulin*, p. 19 hag 20.

**Melar**

*(a zegouez).*

Na kaerra bod lili... 'zo savet  
War zouar blod eur bez... eur bez nevez-klozet.

**Melar**

Bez salaun : ar foll a varvas dem-goude  
M'oam tremenet amañ... penn kenta miz here,  
P'edom o vond d'ar skol goude an east.

**Budog**

Hizio,  
P'emaom o vond d'ar gêr, ma vije c'hoaz bet beo,  
Sur a-walh on-divije adarre e gavet  
O vranñsellad e gorr aze, pe daoulinet  
Dirag skeudenn zantel ar Werhez...

**Melar**

Ya.  
*(Goude eur pennadig, oh en em zistrei).*  
Setu  
Piler gwez ar Markiz !

**Iltud**

*(a zegouez gleb-teil a hwezenn).*  
Emaint o tond diohtu  
Diohtu.. A ! A ! Setu ar skolaerien, 'm-eus aon.  
Klevet ho-peus dija... c'hwezi a ran... skuiz on.  
*(Oh azeza war eur roh).*  
N'edo ket an Aotrou Person er gêr.

**Ar Skolaerien**

*(A-gostez).*  
Petra  
En-deus...

**Iltud**

*(Berr warnañ c'hoaz).*  
Degouezet eo 'velkent ha dodn a ra.  
Dond a reont oll...

**Ar Skolaerien**

*(Etrezo).*  
Foll eo.

**Iltud**

O ! na pebez burzud !

Sellit, ha pegen hir !

### **Melar**

Eun dudi eo, Iltud,  
Ha c'hwi eo ho-peus he hadet war bez ar foll ?

### **Iltud**

*(O poueza war e heriou).*  
Me ?... Med soñjal a rin emaoñ o koll  
Ho spered vad... Me am-bije gellet hada,  
Ha lakaad en eun noz, 'n eun noz da ziheoda  
Eul lilenn ker kaer ? Deh, pa oan tremenet  
Amañ, en eur zizrei d'ar gêr, an heol kuzet,  
Ne oa ket war ar bez, na boket, na netra ;  
Er beure-mañ, p'on degouezet en-dro. A ! ya !  
Kredi a hellit ahanon. Nann, nann, biskoaz  
Em buhez, n'on bet ken sebezet  
Ar muia med gand ar geriou a zo moulllet  
En aour war o deliou... Lennit.

### **Ar Skolaerien**

*(O lenn).*

O ! Maria !

Piou 'n-deus greet an dra-ze ?

### **Iltud**

Eun êl, na petra 'ta !  
Me a zo eet d'ar red d'an Elestreg da gas  
Ar helou d'an Aotrou Person ; bihan ha braz,  
An oll a oar bremañ eo eur zant eo en-deus  
Bebet amañ, pell diouz an trouz, pell diouz ar freuz,  
E-unan.  
*(Eñ a bella eur pennad).*

### **Budog**

Me am-boa lavaret dit, Melar,  
E oa eur zant.

### **Melar**

*(Gand melkoni).*

Mad, me, Budog, a oar bouzar ;  
Med evel al lili, va feiz a venn sevel.

### **Iltud**

*(Deut en-dro).*  
Setu an dud o tond euz ar pevar avel.  
*(D'ar Person).*

Aotrou Person, deut oh... sellit... gwir eo ?

**Ar Person**

*(a dosta ; chom a ra eur pennad da zelled ouz al lilienn, hag en eun taol e pok d'he deliou ; goude e komz, ha dre ma komz, an dud, niverusoh-niverusa, a en em vod d'e zelaou).*

Gwir-tre ;

Ar burzud-mañ eo a heden digand Doue.  
Tostait oll, va zud vad, an hini a vevas  
Amañ a oa daoust d'e follentez eur zant braz.  
Diwar-horre hepken edo e follentez  
A dalveze dezañ da guzad e furnez.  
Hag e garantez vraz 'vid ar Werhez Vari  
He-devoa e zouget d'en em rei oll dezi  
Gand e spered ker kaer, kel lemm ; gand e galon  
Hlan evel al lili a vag o gwriziou don  
Enni ; gand e furnez a reas dezañ kerzed  
War eun hent striz ha ne vez ket darempredet  
Nemeur mui gand an dud ; hent striz ar baourentez,  
Ar vez, an dismegañs, - en despet d'e zanvez,  
Ha d'an oll enoriou ouz e ano staget.  
Rag eun ano en-deus - karet hag enoret -  
Ha bremañ, va zud ker, m'ho-peus c'hoant da vired  
Ar zoñj euz Salaun, en ho mesk 'vid bepred,  
Ar zoñj euz e furnez hag ar zoñj euz e feiz,  
Ha meuli war eun dro Mari, Rouanez Breiz,  
E vije mad sevel el leh m'en-deus bevet  
Ae zant, ha war ar bez a vir e gorv bleuniet  
Eun iliz kaer - 'vel al lili, - kizellet  
E mein galed or bro ; eun tour dantelezet  
Warnezi, ken uhel e veg, ma vo gwelet  
Dre Leon a-bez. Red eo e ve karet  
Amañ ar Werhez adaleg vremañ beteg fin  
Ar bed !

**Ar Bobl**

Gwir eo !

**Ar Person**

Diouz an noz ha diouz ar mintin  
Ha da greizteiz e vo red seni ar hleier  
'Vid e veuli.

**Ar Bobl**

Gwir eo.

**Ar Person**

Ma strewo he splannder

Hag he sikour war ar vro a-bez.

**Ar Bobl**

Gwir eo ! Gwir eo !

**Ar Markiz**

Ar hoad 'vid an iliz, va-unan, m'her roio !

**Iltud**

M'en em garg d'her piled 'vid netra !

**Ar Bobl**

Hag ar vein,

Ni a roio, Aotrou Person !

**Ar Person**

Eüruz e vin.

Salaun, Salaun, kousk mad en da vez don.  
Gwel an enor a reom dit-te ha d'az Intron  
Az-peus karet beteg tremen evid eur foll  
Ha beva er hoad-mañ disprizet gand an oll.  
Eun amzer a deuio e vo gwelet ama'  
Breiz-Izel oll ouz ho meuli, O ! Maria !

*(E-pad am weler ar Werhez, Salaun, daoulinet dirazi, oh en em ziskouez, en eur splannder gaer a-zioh ar bobl).*

**Ar ganerien**

O ! Maria ! O ! Maria !  
Ni ho meul, O ! Gwerhez santel  
Dre m'ho-peus c'hoantaet enori  
Ar paour-kêz foll dous ha fidel  
En-deus bevet ouz ho pedi.  
O ! Maria ! O ! Maria !

Gloar hag enor deoh,  
O ! Mamm ha Gwerhez  
Rag benniget oh  
O ! Maria.

**Ar Bobl**

Kalz o-deus brasoh madou,  
Kaerroh deskadurez.  
Ni on-eus yez on tadou,  
O feiz, o harantez.  
Ni a gar e Breiz-Izel

Or brezoneg, or Feiz  
Skoulmet o-daou, Mamm zantel  
Gand hoh ano e-kreiz.